

HISTOR ADMIRABL

ECUS A VUEZ

SANTEZ HELENA

Var ton : YAN GUERIN.

G. G. R. M.



Brema e fell din discleria
Ar vnez santez Heleoa :
Bezit attentif d'he c'hlevel,
Ho calon sur a vo touchet.

Clevet a refot e buez
Carguet a dristidiguez,
Hac ar martir e deveus bet,
Hac a so ganti c'hearvezet.

Me lavaro dec'h pen-da ben
E voa hi caera femeulen
A guement a vige cavet,
Gand ar bed oll voa enoret.

Beza voa 'vrassa qualite,
Pa voa hi merc'h da eur Roue :
Rac merc'h voa d'ar roue Anton,
E Constantinop' voa e dron.

Pa voa Pab e Rom, sant Clement,
Eones a voa eus e c'herent,
E voe bars er bed-mâ ganet
Er blaves pevar c'hant ha dec.

Gonde an Incarnation
A Jesus, hon roue guirion,
Er guar eus a Constantinop',
Hac estimet bras gant ar bobl.

Pa voe en oad a bemzec vloas,
He mamm diganti a varvas,
Ma fellas d'he zad e c'havet
Evit ma vije e bried.

Mont a eure da gaout ar Pab,
Hac en esper cavet e c'hral,
Evit caout e gonsantamant
Da zimezi d'e verc'h yaouanq.

Ar Pab neuze pa er c'hlevas,
A respont gant eun horror bras,
Pelec'h ma 'r c'hristen var ar bed
A guemerse e verc'h da bried?

Gant an Ilis eo difennet,
Ha gant Doue eo ordrenet,
Na vezo james eurenjet
Eun tad d'e vete'h james nepret.

E ve dimezet eur verc'h d'e zad,
Ennes zo eur c'hrim execrapl ;
Eur c'hrim a enep ar lezen
Siouas, etouez ar gristenien.

P'e devoe clevet *Helena*
Ac'h arruge sur quement-ma ;
Var ar mor en em ambarquas,
Hac e Flandres en em rentas.

Euo pa voe hi arruet,
En eun eclus en em rentet
Pa voe tost da eun abati,
E commançās son ar c'hlec'hi.

Neuze an oll leanezet
A voe qerqent bras estonet
Ø clevet ar c'hleyer o son,
Hac int mont en oreson.

Hac int mont da sellet neuze
Piou a voa eru er c'hontre,
Ma remerqjont eur femelen
A zeue d'ho c'haout pen-da-ben.

Mont a rejont e procession,
Gant respet ha devotion,
Evit monet d'e rancontri,
Gant eur joa vras d'e saludi.

Ha pa velas hi aneze,
E voe estonet bras ive,
Hac oc'h o gueleet a vanden
O tont d'e rancontr evellen.

Neuze recevjont anezi,
Ha conduit d'an abati ;
Rac gueleet a rent oll certain,
E care an Autrou souveren,

Mes un chommas get pell gante,
E cheachas timat a gontre
Dirac ar roue Catebron,
Eun den cruel ha direzon.

Mont a eure var bord ar mor
Evit sovetein e enor,
Hac e pedas merdaïdi
Mar plich ganeoc'h va ambarqi.

Eun dra derruapl a erruas
Pa voant e creiz ar mor glas,
Rac an dud oll a voa lazet
Gant ar c'horserrien arraget.

Exceptet Santez *Helena*,
A voa eur femelen ar gaëra ;
O sonjal cavet e guerc'hdet,
E voa hi ganto reservet.

En oreson en em laqas,
Da Jesus en em recommandas :
M'ho ped, va Jesus, va Roue,
Conservet va virginite.

Pa voe achuet e feden
D'hor Zalver Jesus evellen
Eun tan eus an *Ee* a goesas,
Al lestr hac an dud a lonqas.

Hi voe preservet couscoude
Gant ur planqen, dre c'hraç Doue
Ec'h arnuas e rivier Sign,
E quichennic bord eur jardin.

Ar rivier 'ye bete Londrez,
Hac eno e voa eur verjez,
Hac eur feunteun gaër a gavas.
En e c'hichen e tisquizas.

Ar roue Herri e guelas,
Bars en eun dristidiguez vras,
Azeit en tal ar feautenn,
Ha ne voa den en e c'hichen.

Tostat a ras neuze outi,
Hac e c'houlennas diganti :
Livirit din presentamant
A belec'h oc'h merc'hiq yaouanq.

Me zo eus a Constantinopl,
A guerent pinyidic ha nobl,
Hac a zo ama achiappet
A dec daouarn ar barbaret.

Ah! va c'halon a fazi din,
Rac naon a meus ne allan mui.
Pell bras so n'emeus debret tam
Ha va c'halon em c'hreiz a rann.

Ar roue Herri p'e c'hlévas,
D'e aumonier a gommandas
Monet pront d'a guerc'hat dezi
Peadra vit e soulaji.

Neuze en e c'hassas gantâ
Ebars en he dy da loja,
Hac o tont d'e recommandi
Evel unan a dud an ty.

Goude-se e voent demezet,
Souden e voe gret an euret,
Hac ar fest e padas gante
Befec an nombr a ugent de.

Daou vlaves antier ez int bet
En o flijadur assuret,
Qen en em gavas douguerez,
Neuze e devoe goal vuez.

Digant e mam-gær, ar Zantez,
E devoe cals a baourentez ;
Herves ma rapport an histoar,
E devoa cañz eus a c'hlac'har.

Ar roue Herri a yas timat
Da gaout an tad santel ar Pab,
Evel m'en doa recommandet
D'ar gombat ouz ar Sarazinet.

Lezel a eure en secret
Tri verq er gær deus e gachet :
Rei ras unan da Helena,
Eun all da Vari Cloestra.

An drede nense a roas
D'ar C'hont a voa e vignon bras,
Da bini e recommandas
E briet gant affection vras.

Glac'har vras a voe er pales,
O lavaret adieu assembles,
Hac epad eiz vloa varnugent
N'en em velint sur e nep hent.

Helena e devoa ganet
Daou vuguel a voa cær meurbet ;
He mam-gær a roas da gredi
Penos e devoa bet daou guy.

Ar roue Herri pa glevas,
A voe certen estonet bras.
O clevet e devoa ganet
Daou guy evelse e briet.

Neuze e voe hy condaonet
Da gaout e brec'h deo troc'het,
Hac amaret e bugale
Unan dezi a bep coste.

Ambarquet voe var ar môr bras,
Ebars e Breiz e tisquennas.
Al lestr en devoa e digasset
Da Londrez a zo retornet.

Cri vije' r galon n'a voelje.
Oc'h e gaelet nep a vije,
O rei da zena d'e bugale,
Hac hi prest da vervel digante.

Da gousquet pa en em laquas,
Daou leon eus ar c'hoat a zeuas
Hac a gassas an daou vuguel,
Qement-mâ certen voa cruel !

Un Ermit a voa neuze' r c'hoat,
Ha dionz ar c'hri a zeuas timat ;
Hac a gavas an daou vuguel
Etre griffou daou leon cruel.

Unan ané Bric a hanvas,
Eguile Martin a c'helvas ;
O daou e veant gantan maguet
Epad c'hoezec vloas assuret.

Ebars en pad an amzer-mâ
E voe e Naonet Helena,
Hac eun hostises a gavas,
Truez outi a guemeras.

Chom a eure da zervicha,
Ebars en ty voa' n disterra ;
Dispriset voa gant pepini,
Laqet voa da dorcha listri.

Ober a ré gant dilijanç,
Hep na rebel na repugnanc,
Qement a ordrenet dezi,
En o re oll bep contraigni.

Guelit amâ greg eur Roue
Carguet demeus a baourante.
Rentet qen humbl a qen izel
Dirag ar bed universel.

Sellit brema'n humilite,
Hounez a blich bras da Zoue,
Rac an humbl a zo exaltet,
Hac ar superb zo discaret.

Ar roue Herry distro a Rom,
Ha gantan ar roue Antou,
A erruas en e bales
Ebars ar gêr eus a Londrez.

Allas ! eno pa'erruas,
Ar c'hont Clocester a gavas,
Ha goulen neuse digantâ
Peleach voa eat Helena.

Nao messenger voa digasset
Dirac ar Roue da lavaret
O doa digasset pep a liser
D'ar c'hont Clocester a dra scler.

Mes eun all a zeuas goude,
A lavaras ar virione,
Penos e voa bet trahisset
Gant ar rouanez côz assuret.

Ar rouanez côz so condaonet
Da veza en beo'losquet,
Abalamour ma e devoa
Laqet trec'hi brec'h Helena.

Me lavaro deoc'h ar recit
An daou vuguel hac an Ermit,
Ha penos voe an disparti
Ebars er c'hoat gant calz a gri.

An Ermit var bord ar rivier
A yas gant an dsou vuguel ;
Aman, emezan, o qivis,
Ganeu d'am zy ho tigassis.

An Daou vuguel a respontas
D'an Ermit oute pa gomzas ;
N'en dê qet c'honi-ta, Ermit-mat,
Eo a so a dra sur hon tad ?

An Ermit neuse a lavaras
Deze gant trisdidiguez vras,
Allas m'ho cavaas aman lezet
Etre bleizi ha leonet.

Ha gant truez m'ho tigassas
Ho taou gane d'am ermitach,
Hac e meus ivez ho maguet,
Hoc'h elevet hac instruet.

An daou vuguel a lavare
An eil d'eguile aneze ;
Pa n'en dê an hermit hon tad,
Deomp-ni bremâ da glasq hon mad.

An Ermit a voe trist meurbet,
Pa o c'hlevas o lavaret
E zajent, allas ! da glasq o mat,
Pa na voa qet en voa ho zad.

Pa voant o tisours evelse,
Erruont merdaïdi ene,
Bremâ ez eus c'hoesec vloa
E legezomp ama Helena,

Gant anqen vras digonsolet
De daou vuguel e doa collet,
Ne devoa brec'h nemet unan
Da zicour daou vuguel bian.

Neuze e lavaras Martin,
Bric, va brear, deomp bete'r fio,
Elec'h mar plijo gant Doue hor c'hass,
Ma cavimp hor mam eur vech c'hoas.

Merdaïdi, ni ho suppli,
Plijet ganec'h hou ambarqi,
Ma zaimp en hano Doue
Da glasq hor bro hac hor c'hontre.

Ar merdaïdi a respontas
D'an daou vuguel pa o c'hevas,
Deut en hon lestr hac ambarqet,
Ni ho laqat en douar assuret.

Eo Allemagn ec'h arrijont,
Hac arc'hant dezo a rejont ;
Ouspen e rejont da leina
D'an daou vuguel gant calz a joa.

En Bavier pa voant arrou,
E zeont o daou a ru da ru,
Ma o guelas ar Rouanes
Ebars er ru eus e fales.

Ma gommandas d'e messenger
Mont da guere'hat an daou vuguel,
Rac qen caer oant evel an de,
Clorianda o admire.

Digasset oant neuze dirazi,
Roet e voe deze da zibri,
Neuze evel tud affamet
Ne squizent o tibri o boed.

Re hir ven ma contfen antier
Ar brezel voa er bro Bavier,
Mes beza voant victorius
An daou vuguel, dre c'hraç Jesus.

Martin a voa eun den vaillant,
Hac ebars er gombat sanglant
Laba a reas calz a Sarazinnet,
Ha calz eus an Turquianet.

An Itron Varia Boloigne
O sicouras sur an deiz-se,
Hag evit caout ar victoar
Dre c'braç Jesus var an douar.

Da Dour e tenjont ac'hane,
Eur gaer a so en Tourene,
Sant Martin a voa aumonier
Da rei soulach d'ar beorien qer.

O mam ivez a erruas
En Tour gant eur baourante vras,
Pa voa Martin o tistribui
An aluzen da bep hini.

Goulen a eure diouti,
Pa deuas da zellet outi,
Pealec'h oc'h-hu deuit amâ?
C'houi n'en d'och qet eus ar vro-mâ.

Commanç a ras neuze e galon
Da zonet d'e biqat qen don,
Neuze e teuas sonch dezâ
Ebars en e vam Helena.

Diagnent en devoa clêvet
Evel ma hon eus rapportet,
E voe troc'het eur vrec'h dezi,
Hac en dont da soujal enni.

Neuze en em auavejont ;
Gant joa vras en em saludjont :
Autrou Jesus, eme Helena,
Va bugale gues a velan.


Ne zeziren qet qent mervel,
Nemet guelet va daou vuguel
Autrou Jesus, Roue an Trôn
Homâ zo consolation,
Da eur vam e devoa collet,
He daou hùguel e deus cavet.

Adieu, emezi, va bugale,
Mont a ran brema en han'Boe,
Ho pet ac'hanon sonch a memoar,
Va bugale guer, var an douar.

M'em bezo sonch ac'hanoc'h ive
Pa vin e rouantelez an êe,
Evit ma vezimp oll assembles
Er Barados gant an æles.

FIN.





CANTIC AR BURETE

Voar eun ton nevez.

Clevit oll yaouanquis, avisou excellent,
Tennet deus a Scritur ar zent, an dud savant.
Vit dont da gonservi antier ar burete,
Hac ive ho brud vad e mesq tud ar c'hontre.

Eur paour gant e enor so muic'h estimet
Vit nopl ha pinvidic m'ar bent dishenoret
Rac p'an defe eun den oli vadou ar bed-ma,
Birviquen an henor collet n'al prena.

Hoguen mam an henor eo ar guir burete,
Vel mam an dishenor eo ar lubricite :
Nep so chast a nevo istim oll dud ar bed,
Hini Doue ar zænt, an ælez biniguet.

Vertu ar chastete a neveys en avanç
A dalec er bed-ma ato he récompanç
Vel ma meus lavaret, mes he ini brassa
Vo gloar ar barados, hep biqen finissa.

Divoallomp hon sellou, dorajo ar galon,
Hy ra antren ebars a bep sort sonjeson :
Conduomp aneze gant eur vodesti vras,
Evit conserv bepret ar vertu hac ar c'hraç

E toues ar vugale, vel e mesq an dud vras,
Ar fe, heu hon amzer, so divalo siouas !
A boan e zeo deze gouzout ho lie ha Ba
Ma cannont chansoniou demeus ar re loussa.

Disquomp oll, christenien, ar voyen da viret
Ar burete a gorf hac ive a speret.
Rac balamour ma zeo eur vertu ar gaërs,
An drouc-speret a glasq bepret he distruja.

Satan a zo ouспен, fin ha traïtour meurbet :
En dro deomp emedy gant he bechon stignet ;
Evel eur bleiz, nos de o reded an denvet ;
Divoallomp, me ho ped, rac beza devoret.

Imitomp ar Verchez, Suzanna ha sant Yan,
En eur guir, an oll zent evit bezan divlam ;
Hac hon Salver Jesus, sourcen ar burete,
Er gloar h'on curuno, hed an eternite.

En tuont guemeromp squer deus ar verzerien,
A heuillas er bed-ma oll hent ar binijen :
Na deveus quen moyen da c'honit ar victoar,
Ha da veza eun de recompanset er gloar.

A hent all, re hir ve donet da rapporti
Histoar an dud impur, ha re an dud impi
Balthasar dr' er maro a zo bet pront sqoët ;
Ha Sodom ha Gomorh gant tan an ên devet.

Evit fin pelleomp deus an occasion :
Ra vo hon melezour Samson ha Salomon ;
Ar fura, ar c'hrenva a so deut da gouëa :
Ha nin a gont bezan fermoc'h en non zaa ?

Na neo quet necesser deomp e n'em separi
Na demeus hon c'herent na demeus tud hon zy,
Vit evel hermitet, monet bars er c'hoajou
Da ober piñijen ar rest deus hon deziou.

Er bed gant graç Doue, ha gant bolante vad,
Nin a cavo moyen vit en em sauvetaat :
Tehomp deus ar pec'het, heuillomp an aviel,
Vel Jesus, vit, ganta mont d'ar gloar eternal !

Guerc'hes Vari Mam vad sicour ar bec'herien,
Divoallet ac'hanomp deus hon adversourien.
Gret ma vezimp ato pur, chast, ha vertuüs,
Da c'hortos, en euvo, ganech meuli Jesus.